

v. 117 B  
v. 112 B  
etc. etc. etc. 1102  
has signalé

# BREZEL AN ITALI

1859

---

Neb a bed Gwerc'hess Remengol.  
Birviken n'en dai da goll,  
Da neb he fed gant feiz  
He ro grasou cleiz !!!...

**Ann ITRON VARIA REMENGOL**, Mam ar Vretonnet,  
kurunet gand hon Tad Santel ar Pab Pii Nao, an 30  
vis Mae 1859.

---

Var ton : *Santez Marie, Mam Doue, etc.*

« Guerc'hes zakr a Rumengol, guir Vam ar Vretonnet,  
« Plijet tomman va c'halon, dig'eri va speret.  
« Evit m'a roñ d'am breudeur demeus a Vreiz-Izel  
« Kelou deus ann Itali, lec'h ma man ar brezel.  
« C'houi a zo, en peb amzer, advocadez ar Franz,  
« P'hini deus laket en-hoc'h he brassa esperanz,  
« Pe deus tennet he c'hleze, ha redet d'ann emgan  
« 'Vit kass deus an Itali ar bobl Autrichian.  
« Dr'ennoc'h. Patronez santel, har soudardet hardi  
« A zo bet trec'h d'ar maro, en brezel ar Russi ;  
« Digasset zo bet dec'h da ilis Remengol  
« Eur banier ker kemeret en kaer Sebastopol.  
« Cetu hind éd adarre d'en eum gann en tu mad,  
« O ped truez euz daëlou ho c'hoar, ho mam, ho zad,  
« Pere a c'houlouen ouzoc'h m'ellin pokat d'he c'hoas,  
« Ha dont gant-he d'ho kueleit, devez ho pardon braz. »  
Breziz ker, kent ma teuin da gomz deus ar victor  
A zo, kamat ha kamat, oc'h heuill tud ann Arvor,  
E rankan dec'h lavaret perak ar Francichen  
Zo ed da gemeret peurs er brezel zo o ren.

Brema a zeuz eunnek vloaz, tud foll, pennou re dom.  
A c'houezaz tân ar revolt er gær demeus a Rom  
Evit diskar euz he dron Tad an oll gristenien.  
Hag ellout hervez ho c'hoant, lakat douj ho lezen.

An Tad santel a dec'has dirag an dizurzou,  
Eb lakat he zoudardet da implij ho armou :  
Mes gouarnamant ar Frans a gassas deck mil den  
Da zikour renta dious-tu d'ar Pab he gurunen.

Impalaër an Autrich pa velas kement-se,  
Da vikel bras Jesuz Christ a gassas eun arme,  
Var digare hen dihoual euz ar vanden impi,  
Mæs o sonjal ma vije mest var an Itali.

Hac holl rouanteleziou ar vro italian.  
Ouspen ma zeus kals ané a zo c'hoas goal vihan,  
Dreze, aben ugent vloas, an Autrich a elle  
Ho c'hemer da amezeg an eil goud'eguile.

De a de ec'h avanse varni 'vel eul leon  
Ha gant-han al læeroni, ar vuntr, an drahison,  
Goarset, groagez ha merc'het, ho daouarn d'he staget,  
A doliou bas, en Milan, a zo bet holl lazet.

Puissanzou bras en Europ a skuisas o velet  
Eur bro ken kaër en drubuil, eb kaout repos e bet ;  
Kinnig 'reont d'an Autrich dont d'en em assambli  
Evit gout penos lakat ann urz en Itali.

Impalaër an Autric'h, faro gant he bouar,  
Dallet dre ar c'hoant dastum, a ras skouarn bouzar ;  
Eun arme bras a zavaz hag a lakas da vont  
Var douarou hor mignon, Roue ar Piemont.

Ar Piemont en eum gav en nord an Itali,  
Menez Alpez en trezomb a ra an disparti ;  
Poent a oa kas soudardet beteg ar frontieren  
Pe 'vije deut an Autrich da zebi hor zouben.

Gant hast ar gouarnamant a deuas da c'hervel  
Tud kalonek an Arvor, soudardet Breiz-Izel ;  
Da vouez hon Impalaër ouспен daouzeg mil den  
A zavas, prest da vale, evel unan ebken.

Mes, arog kuitad-ho bro ezint n'en glevet holl  
Evit dont da guiniadi euz Guerc'hez Remengol  
Ar guentau, goude Doue, e gloar ar baradoz,  
Patronez muia karet, ha mam hon tadou koz.

Cetu hint deut da ilis guir *Vam an oll Remed*,  
Templ gant ar Roue Gralon ha Guenole savet,  
Ti santel en pehini Rouanez a envou  
A ra vit he bugale ar brassa burzudou.

Ragtal, e treid an oter, e kuezont d'an daoulin  
'Vit pedi a greiz kalon stereden ar mintin  
Da luguernin noz a deiz var ben an dud e c'har,  
Ha d'o c'hencha, deus an env, var vôr ha var zouar.

« Guerc'hez Vari, emeze, princes vras an aele,  
« Ho servicherien kenta, Gralon ha Guenole.  
« O deus gret dec'h an templ-ma, ken kêr ha ken huel,  
« Vit selaou hor pedennou ha difen Breiz-Izel.

« Cetu ni holl adarre o vont er mez hor bro,  
« Ni a lavar dec'h. Guerc'hes vad, ken a vo an distro ;  
« Mar c'homp laket da drec'hi an Autrichianet,  
« E tigasfomp d'oc'h ilis eur banier d'he tapet... »

Sevel a reont neuze, gant ho guialen ven,  
Da vont ini hag ini da bokat d'ar skeuden ; (an imâg)  
P'o devez ive poket da relegou sænt Breiz  
Ereont, gant eur feiz vraz, teir guec'h tro an illis.

Goude beza n'eum vouestlet a gorf hag a ene  
D'ho fatronez gallouduz pep hini aneze  
En deuz laket binniga, evit beza douguet  
Eur vadalen burzuduz eus *Mam an oll Remed.*

Arog mont deus an illis hint chomet sebezet  
Dirag eur banier nevez gant aour ha perles gret,  
Ha digasset deus Paris abeurs Napoleon,  
Pini zo en em laket dindan gouard hon Itron.

Kuitat reont gant fianz on Mam an oll sikour.  
Mes arog koll ar guelet demeus a veg he zour,  
E kouezont var ho daoulin, vit ar vech diveza,  
Hag e kendal c'hont laouen ho hent en eur gana,

Aben teir zizun goude e oant dija erru  
Er vro elec'h ma klee bea an emgan ru :  
Evel en eur zer-lagad, ker prim hag al luc'het  
Hint en em gavet dirag an Autrichanet.

L'an nao demeus a vis mae, Napoleon trede,  
A zo ed d'en eum lakat er pen deus he arme,  
En eur fiout he bried hag e vab, c'hoas bihan,  
En nerz hag e karente tud leal ar vro-man.

D'ar c'houezek ar memeus mis, kant adversour barvek,  
Evit diskuez peguement ezint tud kalonek,  
A zo deut dreist eur voguer en noz ha kuzet stard,  
Var eiz zoudard euz a Frans, a oa oc'h ober gard.

Bet o devez ar goal chans d'ober eun dro c'hollo ;  
Mes d'an ugent, en eul lec'h hanvet *Montebello*,  
O deus kredet n'eum digoll d'euz o zol diagent,  
En eur gass var hon arme pemp mil den varn'ugent ?

A zeitekvat bataillon chasseourien var droad  
Gant pevar regiment, leun a zoudardet mad,  
Gant general Forey, pemsek mil den ebken  
A oa karguet da zerc'hel penn d'an adversourien.

Mes bugale an Arvor, an dud-ze ker kalet  
Ha ker liennet a fizianz er Verc'hes binniguet  
Deus ho bruchet, o tridal, a den ho medalen ;  
Pokat reont c'houek dezi, ha kerken... *tor he benn !!!*

Var kement zo diraze e saillont evel tigret,  
Pep tol digante a zrail an adversour spontet  
Ha red dezan n'eum denna goude eur stourmid ber  
Gant daou mil den mac'haignet nidaou c'hant prisonier.

Deg devez just, goude ze en tachen *Palestro*  
Gant drede regiment a zouavet d'ho zro,  
A doliou baïonettez an Autrichianet  
A zo darn âne lac'het ha darn all zo beuzet.

C'hoec'h kant prisonier zo gret var an adversourien,  
Eb implija ar vintrail, hag eb losken eun ten ;  
Kanoillou an adversour zo ive kemeret ;  
Ra vo bepred an drede a zouavet brudet !...

D'ar bevar a vis even, var dachen *Magenta*  
E ze bet ar stok spontuz hag an emgann goassa ;  
C'hoec'h ugent mil adversour oa n'em gavet eno  
Evit klask trec'hi eur vech soudardet kre hor bro.

Tud kalonek ar Arvor, ken evit skei ho zol,  
A stard deus ho muzellou medalen Remengoll ;  
Ho feden gant ar Werc'hez a zo bet selaouet :  
*Ugen mil Autrichian a zo gante lazet !!!...*

Tri ganol a daou vanier gant seiz mil prisonier  
A zo deut ive gante en eur memeuz amzer  
Tud kalonek Breiz-Izel n'hin ket vit mont da goll  
Eur vech m'hint en em voestlet da Verc'hes Remengoll.

Eur breton, Ian-Mari Menes, a Plourin-Montroulez,  
Kasset en eun hospital da barea he vlez,  
Goude var park am emgann gred eun tol kaër  
En deus recevet ar groas a zorn an Impalaër

D'ar c'hoec'h eus a vis even er ger gaer a Vilan  
Skuiset gant goalen ouarn potret Autrichan  
A zo em revoltet hag an adversourien  
O deus savet skanv ho zroad dre n'ellen erzel ken  
Kanoillou a zo chomet var lerc'h an adversour  
Kouls a daouzek mil fusuil ha coufrou leun a sour ;  
A brizonnerien ive e zeus eun iver bras :  
Ema a zo eun devez vel neus ket guelec c'hoas.

D'an eiz deus a vis even gant hon Impalaër  
Roue bro a Piemont zo antreet en kæer  
Deus a bini an oll dud o devez recevet  
Gant eun triomf ar c'haera princet ha soudardet.

Vit trugareka Doue ha Gwerc'hes Remengoll  
Da vea gred d'an Autrich tec'hel dirag an oll,  
E katedral kaer Milan, dirag ar bopl stouet,  
Eun *Te Deum* ar c'haera zo bet neuze kanet.

Da vouel Sant Ian-Badezour, kerkent a peder heur,  
Var bord ster a *Mincio*, e zeus bed, va breudeur,  
Eun emgann ar spontussa, eul lac'heres euzus  
Etre an enebourien hag hon tud ken nerzus.

Ouspen kant anter kant mil soudard Autrichian  
Dispaket var hed pemp leo en eur blenen ledan  
A sonjas dre finesse diskar hon soudardet ;  
Dre c'hraz Doue int bet c'hoas er veach-ma diskaret.

An emgan pad daouzeg heur a voa tòm hag ingal,  
Eb beza trec'h en tu ma, nag ive en tu all ;  
An diou arme 'kreiz an tan, korf a korf a voa krog,  
Eb n'elle den mont a dre, na mont var an arog

Eur bæleg koz euz a Vreiz, dispaket he vleu guen,  
Enem strinkas dan daoulin neuze, kreis ar boultren ;  
Evel goechal Moïses, e zavas he ziou vrec'h  
Evit goulen d'hon arme nerz ha zikour deus annec'h.

Kerkent soudardet hor bro a velas eur skeuden  
Eus ho fatronez zantel aseet voar eur goabren.  
Neuze, laouen, d'an daoulin ezint n'emp strinket oll,  
En eur grial : *Meulodi da Verc'hes Remengol !!!...*

D'ho medalen e pokont... ah dao neuze dispar...  
Treggont mil Autrichian a gouezas d'an douar...  
Evit ar bevare guec'h o deus goueet pen da ben  
Pegen terrubl e potr Breiz par lavar : *tor e benn.*

Eun arme a spontussa kurun, avel foll dour,  
Dichadennet gant Doue, ha d'ho sikour...  
Impalaër an Autrich o velet eur seurt tro,  
A dec'has deus on emgan eb laret ken a vo...

Gloar, honor a meuleudi da Batronez hor bro,  
P'hini e deus biniguet emgan *Solferino* ;  
Ra vezo bepret karet, ha meulet er bed oll ;  
Mam dener ho soudardet, Guerc'hes zakr Remengol !!!

Pebez burzud eo heman !.. An daou Impalaër,  
Goude a brassan brezel a zo mignonet ker...  
Ar goad ne redo muioc'h, ar peoc'h zo sinet,  
O Gwerc'hez zakr Remengol, ra viot c'hoas meulet !!!

Sehit, sehit ho taelou, mamou karantezuz,  
Soudardet vad Breiz-Izel, ho mibien galloudus,  
Goude bezan gonezet en emgannou, bep tro.  
Gant honor ha levenez, ez int erru d'ho bro !

P'ho bezo bed an eur-vad da bokat d'ezo c'hoas,  
It da illis Remengol gante d'ar pardoun bras,  
Grit teir gwêch an dro d'he-zi, en eur bedi gant feiz,  
Ha pok ive, gant joa, da relegou saent Breiz...

E touez ar belerinet diredet a bep tu,  
Hor soudardet kalonek gant ho brageier ru :  
E korf ho rochet gwadek, diarc'hen, diskabel,  
A vo er prosession gant **BANIER AR BREZEL !**

Eur banier ken honorabl, gant boulejou toullet,  
A vezo gant an holl dud banier ar peoc'h hanvet...  
Gloar da Zoue en envou, ha peoc'h d'ar bed hol,  
Gloar, meuleudi da viken da Verc'hez Remengol !!!...

Tud leal a Vreiz Izel, tud kalonek va bro,  
C'hui evit pere kaleñ ar vue zo c'huero,  
Joa deoc'h var an douar ha graç digant Doue  
Da visita Remengol, ar zourzen ar vue.

Pedit en ho klevejou, pedit en ho klac'har,  
Ha pedit en holl boanio hon eus var an douar.  
**BRASSA SANTEZ ZO ER BED, GUERC'HES SAKR REMENGOL ;**  
Mar bezit devot dezi biken na deot da goll.

Tadou kez, mammou tener, c'hui oll pere a zo  
Ankeniet gant ho mibien ed pell demeus ar vro,  
Deuit da illis Remengol, **ILIS AN OLL REMED,**  
Hag a vo ho pugale er gae deoc'h c'hoas rentet.

## Peden d'an Itron Varia Remengol

Gwerc'hez zak Remengol, Patronez Breiz-Izel,  
Pedit vit ar zoudardet zo en tñn ar brezel,  
Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet  
O deus ho karet, ho kar hag ho karo bepred.

Kenniget gant Bars Itron Varia Remengol,  
d'he vignon ker Kloarek Koat-an-Noz.

E Remengol, an naontek a viz even 1859. da zul an Drindet  
devez Pardon Bras ITRON VARIA REMED-OLL.



# INTAON AL LOCHEN



Var ton : *Sant Kaourintin, Saint Guénolé*

Er bed ma, nak aour nak arc'hant  
N'ho deus biskoaz staguet ma c'halon :  
N'hon nemet eur c'hez païsant.  
Kontant e oan em c'hondition,  
Mes va fried karantesuz  
A gollan hirio, pebes anken !...  
Guelit a n'hon ket maleuruz ;  
C'huec'h c'hrouadur a m'euz em lochen (*bis*)

N'amzer ma oa beo va fried,  
He furnez a charma va c'halon  
Va bugale, euz va c'haret,  
A roe din konsolation :  
Beb eil e poken de-z-he ;  
Eun tad evurussoc'h na vo biken.  
Dre ho gestou tener, bemde,  
E oan euruz ebarz em lochen (*bis*).

Da vintin, pa c'han d'ar parkou  
Adare da gomans va devez,  
E lezan va bugaligou  
Euz va zi da gomeret evez ;  
Ha da noz pa zeuan an dro,  
Evit va distrei deuz va anken,  
En em stardont holl var va zro,  
D'ah c'honsoli ebars em lochen *(bis)*.

Braz oa va laouenediguez  
Pa vijen er guer gant va ziad,  
Breman pa velan va merc'h kez  
An dour a deu var ma daoulagat,  
Seblantout a ra din bepret.  
Guelet he mam em c'hichen !!!...  
En despet d'am c'heuz diremet,  
Hon c'hoaz euruz ebars em lochen *(bis)*.

Ha ! ma chalfen eb kaout mizer,  
Sevel a diski va bugale !  
Me c'halfe c'hoaz, gant an amzer,  
Fortunia va merc'hik, marteze !...  
Neuze va fotret a vo braz  
Capabl da labourat eun dachen,  
Em c'hosni me allo c'hoaz  
Beva euruz ebars em lochen *(bis)*.

Eurusoc'h c'hoaz me n'em gavo  
P'ho guelin o c'honit ho bara,  
Neuze pa zetuio ar maro  
Eus ar vuez-ma d'am delivra,  
Va mignonet am enterro  
Gant va fried, pe en he c'hichen !!!...  
Ha va bugale a bartajo  
Va zam tieguez ha va lochen !!!... *(bis)*

Em gouele douar pa vezin  
E repos e beret Remengol,  
Plijit kemer truez ouzin,  
O Itron-Varia Remed-Oll !  
Ha pa deui va bugaligou  
Var ma bez da ober ho feden,  
C'hui, ma Doue, a bardonno  
Da ene paour intaon al lochen. *(bis)*